

# LIZHER DA STROLLAD "BELEION BREIZH"

## Kenvreudeur ha kenvroiz kor,

War vërdo on ehomet ur ponnad mat, a-barzh kas deoc'h ar predoriadennoù-mañ, en abeg da warded va yec'hed ha d'am divarregzh. Daoust ha talvezout a rajont d'un dra bonnak ?

Met trec'h eo bet din, pelloc'h, mouezh va c'houstiañs. Talvoudus pe get, un dlead eo din displegañ va menozioù, ken e-keñver ar veleion all, ken em c'heñver va-unan. Em c'heñver va-unan, eo un dlead din anaout ha reizh eo din kenderc'hel da bleustrif an hent am eus klasket pleustrif abaoe 37 vloaz. E-keñver ar veleion all, eo un dlead din ober an dibab : pe chom, ganeoc'h, disheñvel diouzh va c'henvreudeur pe en em zistagañ diouzh ho strollad.

A-hend-all, o vezañ unan eus izelañ beleion an douar, n'eus riskl ebet evidon da foukañ hini ac'hanoc'h, nag abeg reizh ebet da vezañ fouket, pa vin dislavaret. Dre se, e c'hellan dispakañ didroidell va breutadenn. Kredif a ran ez oc'h a-du ganin war meur a boent. Kredif a ran ivez, avat, eo ret embannañ kement a zegemeromp a-unvouezh ha mont eun gant an hent hon de dibabet.

xxx  
x

A-benn ober eus "Beleion Breizh" ur frammadur diazezet-mat ha padus, e kredan ez eus, da gentañ, da zirouestlañ ur gudenn-diazez : kudenn ar reizh ma vije strivañ da adsevel ur gumuniezh veur a Vrezhonez.

Ma paouezfemp da zure'haat etrezek an uhelbal-se, ne gredan ket e vije gallet reiñ e ster gwir da gement tra a c'hellfemp embregañ war-dro an "traoù breizhek", pe evit diskoulmañ kudenn-pe-gudenn, ken war dachenn ar vuhez kevredigezhel, ken war dachenn ar bastorelezh.

Peogwir en deus hor strollad kemeret <sup>an</sup> a "Veleion Breizh", n'am eus abeg mat ebet da vezañ en amzivin war gement-mañ : holl e soñjomp e deus ar Vrezhonez un ezhomm strizh eus ur vuhez kevredigezhel vreizhek, hag e tleer, dre se, gant ar Vrezhonez all, krouiñ pe lakaat krouiñ ar muiañ ar gwellañ a frammadurioù, da ziazezañ ha da harpañ ar genvuhez-se.

xxx  
x

Met n'eo ket aze emañ an dalc'h gwashañ. Ar pezh a seblant dimp peuranat hag eeun a-walc'h a rank bezañ displeget dirak ar Vro a-bezh. Da bep Breizhad eo ober e zibab, ne c'hellomp gwaskañ war hini ebet na rebech dezhañ un dibab disheñvel diouzh hon hini. Met ret ha peurret eo lakaat pep hini e-tu d'ober e zibab, gant pep anaoudegezh ha pep omskiant eus e giriagezh. Hag ar pezh a zo ret evit pep Breizha a zo un tamm mat retoc'h evit kement beleg breizhat a zo. Mar deo ret, ken mallus-all ez eo !

N'ouzon ket war begeit hoc'h eus bet tro da verzout ar speurenn a zo etrezomp hag ar veleion all a Vreizh, en abeg d'hor "menozioù breizhek". Ni beleion eus eskopti Kemper hon eus a-walc'h a skiant-prenet war ar poent-se. Ar bras eus hor c'henvreudeur, mar deo gwir ez int bremañ gouzafvus a-walc'h, ne gomprenont mann en hor c'hempertamant. Met ni kennebont n'eo ket aes dimp ober diskleriadurioù, o vezañ n'hellomp ket en em harpañ war frammadur ebet. Kasasoc'h 'zo, avat. Kavout a reomp dirazomp rumm ar genvreudeur a ra ul labour brezhonek hag a zou, a-benn ar fin, war a gredomp, da vezañ ul labour divreizhek : rak distreiñ a reont kalz re yaouank diouzh al labour-adsevel Breizh. Dirak ar rumm kenvreudeur-se, muic'h c'hoazh eget dirak ar re all, eo ret dimp diazezañ hor sturiennoù, o displegañ ervat hag e skignañ.

xxx  
x

Kentañ tra hon eus da ober, a gav din, eo digeriñ an hent d'hor c'henvroiz ha d'hor c'henvreudeur da dizhout an omskiant eus ar vreizhadelezh. En deare-se, e roimp dezho an tu d'ober e dibab : pe kemer war e c'hont ar vreizhadelezh, pe disteurel anezhi, ar vreizhadelezh e vezañ kement a stag pep Breizhad ouzh ar Vreizh a-wechall hag ouzh ar pezh a chom bremañ anezhi.

2/ Krediñ a ran eo mat dimp loc'hañ diwar an tri c'her-mañ : BREIZH, BREIZHAD,  
(pe : Brezhon), BREZHONEG.

An tri c'her-se hor c'has d'ur BOBL hag he deus kenvevet hag en em renet e-doug  
mil bloaz, e stern ur STAD dieub.

An hêrezh a-ziwar ur genvuhez ken padus a zo enlouc'het e pep hini ac<sup>o</sup>hanomp.  
Ur fed hag a zo sebezus, pa soñjer mat, hendiskouez splann a-walc'h : an doug d'ar  
brezhoneg e-touez ar yaouankiz. Eveljust, evit Breizhuheliz eo disheñvel an traoù,  
met gwelout a reomp, dre ar fedoù, e c'hellont tizhout, koulz ha ni, an emskiant eus  
o breizhadolezh.

Gant harp an tri c'her meneget, hon eus an tu da lakaat an dud eus pep korn a  
Vreizh da bignat a-us, n'eo ket hepken d'o farrez-c'henidik, met zoken d'o c'hornbro  
ha d'o rannyezh.

A-hend-all, e vo mat dimp en em harpañ war ar sell a daol warnomp an diavaezidi.  
Ar Vrezhoneg divroet a dizh buan a-walc'h an emskiant eus o dibarelezh e-kreiz ar  
bed. Met ar re chomet er gêr o deus ezhomm eus helezeur an estren : homañ a c'hell  
faziñ war ar c'hemm a zo etre ar Vrezhoneg hag ar pobladoù all, met ne fazi ket,  
pa verz ez eus kemm.

A-feur ma teuio ar Vrezhoneg da zizoleiñ an hêrezh vroadel a zougont enno e-unan,  
e vint e-tu da zibab. Ma kemeront anezhi war o c'hont, ne c'hell bezañ nemet dre ma  
soñjint ez eo un harp evito er vuhez, un dalvoudenn-diazev, hag a vije mezhus ho  
disteurel ha treiñ kein dezhi.

XXX  
X

Amañ e tarzh ur gudenn a vuhezgezh. Diwar c'henel en ur c'holec'hiadur breizhek  
eo e teu dimp ar vreizhadolezh. Stag eo homañ eta ouzh hor c'hrouidigezh. Daoust,  
neuze, ha n'eo ket dismegañsus evit hor c'hrouer, ma klaskomp diverkañ diwarnomp an  
enlouc'hadur a zou dimp gant hor c'hrouidigezh, un enlouc'hadur hag a chomo ganimp,  
dre gaer pe dre heg ? Ne garfen ket lakaat da zlead a goustiañs evit ar Vrezhoneg  
(evito holl e vije, na petra 'ta !) kemer war o c'hont ar vreizhadolezh ez int ganot  
ganti. Met krediñ a ran ez eo an dibab-se an hini reishañ. Da nebutañ, ne asantan  
ket d'an dispriz a vez taolet war ar re a zibab an hent strizh, war zigarez maz int  
un isdarn (minorité) dic'halloud.

Kavout a reomp kelennadurezh a-zivout ar broadelezhioù dihum, ar re a glask, dre  
vras, mirout ha dispakañ o fersonelezh. Met a-zivout ar varnedigezh da skoñ gant  
ar re a zinac'h o broadelezh, n'ouzon ket ha bez' ez eus sklerijenn en un tu bennak.

XXX  
X

Eveshaomp bremañ ouzh ar pezh a zo dalc'het e plegoù an dibab graet a-du gant  
ar vreizhadolezh. An dibab a reer eo B E V A N e-giz Breizhad. An dibab-se, a-benn  
bezañ poellek, en em led war ur vuhez-den en he fezh, war gement a darzh eus ar  
bersonelezh. Anat eo penaos, hervez lezennoù an natur, n'eus tu ebet da ren ur vuhez  
vreizhat klok, nemet en ur gevredigezh vreizhat klok. Ur seurt kevredigezh, n'eus ket  
anezhi d'ar c'houlz-mañ. Met un ezhomm strizh hon eus anezhi, ha durc'haat a tankomp  
etrezek enni. Ar pezh a c'hellomp ober diouzhtu eo krouiñ, tamm-ha-tamm, ur gumuniezh  
laosk a Vrezhoneg, dre sevel frammadurioù (unan anezho gant bodad "Beleion Breizh"),  
e-lec'h ma c'hellimp en em harpañ kenetrezomp evit kevrenn-pe-gevrenn eus ar vuhez  
vreizhat.

Met ur skoilh divent a zo dirazomp: dalc'het omp e stern ar gevredigezh c'hall,  
ur stern hag a zo e bal hon harpañ da vevañ e-giz Galloued. Leal e vo dimp hen  
reiñ fraezh da c'houzout : ur gudenn-vevañ eo evidomp bezañ dalc'het e frammadurioù  
hag hor redi da zegemer ha da startaat warnomp ar stern gall (darn eus ar frammadur  
rioù-mañ o vezañ frammadurioù-iliz). Ur gudenn-vevañ eo evidomp klask en-dro dimp  
pe krouiñ dimp hon-unan frammadurioù, e-lec'h ma vimp gwarezet un tamm bennak diouz  
ar stern gall. Ne c'hellomp ket bezañ, war an hevelep tro, izili, gant perzh klok, eus  
div gumuniezh ken disheñvel ha ken enebus an eil ouzh eben ha maz eo an hini c'hall  
hag an hini vreizhat !

Amañ e tizhomp kalonenn ar gudenn : daoust ha reizh eo, hervez Doue, eus hor ponn  
hon-unan, krennañ e dachenn d'ar stern gall ha klask adsevel ur gevredigezh  
vreizhat ? Evit respont d'an aters-se, e-doare da herzol ouzh pep pismigadur, n'eus  
ket re ac'hanomp holl : aze emañ, d'am meno, poent kentañ hon imbrezh.

XXX  
X



Ur gevredigezh vreizhat, a-benn bezañ breizhat, ne c'hell ket bezañ savet diwar netra. Ereket e rank bezañ ouzh ar gevredigezh a-ziagent, bet diempret tamm-ha-tamm a-hod kantvedoù. Dre eno hepken, e vimp Breizhiz koulz hag hon hendadoù. Hag amañ e kavomp un ere-meur : ar YEZH !

Talvoudus e tlefe bezañ, mearvat, ar pezh a zegas dimp ar ouezoniezh a-zivout ar "o'homz" (le langage) - war an dachenn-mañ en peurzizesk. Met ne gredan ket o ve didalvez en em harpañ war ar skiant-vat. Amañ e tiziloomp gwirioneziou eus ar re bouezusañ. Pep yezh en em ziskouez dimp evel un ere etre remziadoù ur vroad ; aes merzout pegen pouezus eo se.

Met ken pouezus-all a zo. Ur yezh a zo, a-raok pep tra all, ur benveg ! Met ur benveg dioutañ e-unan. Bez' ez eo ur benveg a eskemm kevredigezhel, e diabarzh ur strollad-tud, peurlipsañ e-diabarzh ur bobl a-bezh pe ur vroad.

Bremañ e tistroan war unan eus an tri o'her-diazez : ar BREZHONEG .

Da betoro strollad-tud e brezhoneg e yezh, ma n'eo ket da bobl ar Vrezhoneg ? N'on ket diabar e vije bet ijinnet a-bell 'zo ar gerioù a : kerneveg, tregorig, leoneg, gwenedeg. Met arpezh a ouzon mat eo penaos e komz Leoniz : brezhoneg Leon, brezhoneg Kerne, h.a... Se a ziskouez, ma ne fazian ket, n'eus, evit ar werin, nomet ur brezhoneg hepken, e meur a stumm, n'eo ket dishañvel, met damhañvel. N'eo ket ni a laka unvan ar brezhoneg : a-viskoazh eo bet ! Met ma ne vije ket bet unvan, e vije bet un dlead dimp ober unan unvan. N'eo ket rannvroioù eo hon eus da adsevel, met, kement ha ma vo tu, ur gevredigezh klok.

Dre-se, ne welan ket porak ne zistrolfemp ket, ar fraeshañ ma vo tu, ar striv a c'hoarvez en-drô d'ar rannyezhoù, evit o sevel d'ar renk a yezhoù ha diverkañ tamm-ha-tamm unded hor broadelezh. Evidomp-ni, ur seurt striv ne c'hell ket kaout ur seurt ster, ma ve poellek gouestlañ dezhañ kement a ijin, a amzer hag a arc'hant .

xxx  
x

Larkoc'h on rediet da vont, hag amañ e kejjomp gant ur gwir galvar. Ar brezhoneg a zo unan eus elfennoù-diazez hor breizhadolezh. Hervez ma vez komzet ganimp, e trua da vezañ unan eus ar frammadurioù pennañ hon eus ezhomm, ken evit en em wareziñ diouzh ar stern hag ar c'huñtur gall, ken evit adsevel hor broad. Seul welloc'h frammadur e vezo hor yezh, ma raimp anezhi ur benveg klok a eskemm speredel. A-hend-all, e-pad dokvedoù pe marteze kantvedoù c'hoazh, e vo implijet ar galleg hag ar brezhoneg keñver-ha-keñver. En abeg da se on a-du gant un "divyezhegezh urzhiet". N'eo ket, avat, an hini a zo bet kinniget dimp betek vremañ. N'eo ket kennebent un nevezinti. N'hon eus nemet kenderc'hel gant labour ar re o deus kroget da grouiñ ar brezhoneg arnevez. Ar pal kentañ da dizhout a vije lakaat ar brezhoneg kevatal a-walc'h gant ar galleg, e-doare ma vo an nebeutañ ma vo tu a ziaester o tremen eus an eil yezh d'eben. Seul zougetoc'h e vezer da zibab etre daoù venveg an hini aesañ, ma vez bras ar c'hemm etrezhañ e-keñver aester ; aes gwelout gant pehini eus an div yezh ez a ar maout war ar poent-se. N'hon eus ket an dibab, a gav din. Mar fell dimp bevañ a-gevret e-giz Brezhoned, e rankomp dont gouest da ziskleriañ pep tra e brezhoneg. Un dachenn ez eo mall he gounit en he fezh eo hini an divizoù peñdeziek, evit ma c'helle ar brezhoneg bezañ muioc'h-mui aergelc'h dihunus tiegezhioù an Emsav. Ar yezh eo benveg ar spered ; ezhomm en deus ar spered anezhañ, n'eo ket hepken evit dispakañ, met evit krouiñ, war bep tachenn.

Merzomp, avat, eo ret dimp, n'eo ket hepken krouiñ miliadoù a gellidgerioù (pe neveze'heriù), met o deskiñ hag implijañ ar re anezho a gavimp dereat (hep bezañ re figus atav) . Ur striv ranzel, maz eus ! Met ur striv hag a rank bezañ urzhiet evel pep tra all, e-doare ma ne zeuio ket da vezañ ur gwir binijenn.

xxx  
x

Hag e tegouezhomp gant kudonn an implij eus ar brezhoneg en hor strollad. Me 'gred e vim kellavar war gement-mañ : an implij-se a ranko bezañ al ledanañ ma vo tu. Ne c'hellomp resisaat muioc'h al lezenn-mañ, nemet dre gendiviz. Koulskoude e kredin ober ur c'hinnig : o vezañ n'omp ket boazet da zisplegañ e brezhoneg, dre gomz, an traoù a vezimp galvet da zisplegañ kenetrezomp, o vezañ n'hon eus ket atav en hor spered ar gerioù hag an troioù-lavar hon eus ezhomm, perak ne aozfemp ket dre skrid hor monoziou, evit o lenn dirak an holl ? Pep hini eus ar selaouerien, bewech ma ne gomprenfo ket tra-pe-dra, a c'hellfo lakaat al lenner da chanañ ha d'hen treiñ e galleg. Ar galleg boazet a zo bet pinvidikaet tamm-ha-tamm dre ar galleg skrivet. A-bouez skrivañ ar brezhoneg, e teuimp a-benn d'e gomz hervez ezhommoù hor spered. Evit ar c'houlz, n'hon eus skol all ebet, a gredan.

4/ D'am meno, ul lodenn vat eus hol blabour a dlec bezañ imboure'herezh.  
Pep hini, end-eeun, a c'hello, gant skridoù bet aozet gantañ er gêr ha lennet da-c'houde e-kerz an emvod, kemer perzh en imboure'herezh-se. An tabuterezh, diou diouzh ret, a vije kaset endro e galleg. Ur wech muic'h, n'eo aotreet dimp lezel tachenn gant ar galleg, nemet pa n'eus tu ebet d'ober a-hend-all. Anez da se, e troomp kein d'hon uhelbal.

XXX  
X

Ur wech ma ve bet spisaet ganimp ar menezioù-stur an eus menegot, e vo mat dimp spisaat pal hor strollad.

D'am meno, erin ar c'hudennoù e tlefemp plediñ ganto a zo en ur fed a-vremañ hag a zeu da vezañ muic'h-mui heverk : bez' ez eus un niver pouezus a Vrezhoned hag a striv da adsevel ur gumuniezh vroadel, a-benn gellout bevañ enni evel Brezhoned.

Met, a-raok mont larkoc'h, eo ret eveshaat e petore plegenn e c'hoarvez ar fed-diazez-se. Da gentañ, e c'hoarvez en ur Vreizh e-lec'h ma chom an usdarn (majorité) dianaoudek pe digas e-keñver ar gwir vreizhadelezh. Ar vroadelourien a zo galvet da chom c'hoazh, e-pad pell, un isdarn. D'an eil, e c'hoarvez en ur Vreizh e-lec'h maz eus, war dachenn ar c'hultur, meur a embregadenn ha n'int ket lakaet e dalc'h ar striv evit ur vuhez vroadel.

Eus ar fed-diazez maz eo an Emsav e tarzh ar rummoù-kudennoù-mañ :

1/ - Kudennoù ar Vrezhoned katolik :

- a) e-barzh an Iliz ;
- b) e-barzh an Emsav.

2/ - Kudennoù ar Veleion gatolik :

- a) e-keñver renerezh an Iliz ;
- b) e-keñver katoliked an Emsav ;
- k) e-keñver o c'henvroudeur a-ziavaez an Emsav ;
- d) e-keñver katoliked Breizh a-ziavaez an Emsav.

Dirak ar fed-diazez hag ar c'hudennoù a darzh anezhañ, setu amañ ar paliou a lakafen-me d'hor bodad :

1/ - IMBOURC'HIN an dilerc'hioù, e-keñver an emsoñj hag an ober, o tinaouiñ diouzh ar c'hevreet maz eo ar vroadelourion gatolik, war an hevelep tro, ouzh an Iliz hag ouzh an Emsav, ez int izili anozho.

2/ - KEVREDIN AR VELEION a anzav ar c'hevre daouduck-se enno o-unan koulz hag e katoliked an Emsav, evit reiñ tu dezho da lakaat da dalvezout disoc'hoù o imboure'herezh e-keñver ar perzh da vezañ kemeret

- gant "Belecion Breizh" ,
- gant katoliked an Emsav,

- a) el labour-adsevel ur gumuniezh vroadel a Vrezhoned ;
- b) e Kefridi an Iliz e-keñver an Emsav hag e-keñver Breizh dre vras.

(Evezhiadennig : Ne gredan ket e talvezfe ar boan dimp pouezañ war hon Eskibien evit ma kemmint hervez hor c'hoant pastorelezh an Iliz e Breizh Evit c'hoazh eo re isdarnel (minoritaire) an Emsav. Pa vo deut da vezañ usdarnel, e vo kemmet Breizh hec'h-unan, ha neuze e vo ret-mat d'an Iliz, dre gaer pe dre heg, kompañ he fastorelezh. Da c'hortoz, ar pezh a zo war hor c'hont eo kompezañ, hervez ar reizhded, an darempred etre an Iliz hag an Emsav, evit mañ an div gostozenn.)

Da glozañ : divizet e oa bet e vije un emvod ganimp wardro ar lañ a Vae.

Bodadeg an Unvaniezh Speredel he deus kemeret e lec'h.

E-sell anezhi eo an eus savet an notennoù-mañ. Kemer a rankomp tro ac'hano da welout ha bez' e vo tu da aozañ un emvod a-benn miz gwengolo, evel ma voe meneg e Mur.